

14.

Var mor ar bed, o Mam Doue,  
 Diouallit mad ho pugale,  
 Hor c'hassit oll d'ar Baradoz,  
 E ma Jesus ouz hor gortoz.


Quimper, le 30 Mai 1904.

**IMPRIMATUR :**

**Em. FLÉITER,**

Vic. gén.

# Itroun-Varia-Beg-ar-Raz



Var don : RUMENGOL

1.

Var zouar Plogoff, e Beg-ar-Raz,  
 A bep tu var wel d'ar mor braz,  
 D'ar Verc'hez-Vari zo savet  
 Eun imach marbr, kaër meurbet.

*Diskan :*

Itroun-Varia Beg-ar-Raz,  
 Dirazhoc'h e ma ar mor braz,  
 Var hon listri, var hor bagou,  
 Savit ho torn leun a c'hrasou.

2.

Mari, va he breac'h gallouduz,  
 A zo gant-hi he Mab Jezuz ;  
 Eharz he zreid, hanter-veuzet,  
 Eur martolod zo daoulinet,

3.

Eur martolod hanter-veuzet  
 Ouz eur garrek a zo peget,  
 Hag e zorn deo varzu Jezuz  
 A zao gant eur zell truezuz.

4.

Hag e vel ar Mabik Jezuz,  
Ken douz ha ken madelezuz,  
O c'hasten he zaouarnigou,  
'Vit hen tenna d'ez an tarziou.

5.

Hag ar Verc'hez ken douz, ker mad,  
A unan gant Jezuz he Mab,  
'Ra ive eur zell a druez  
Varzu ar paour martolod kez.

6.

Martolod kez, piau er c'hredo ?  
C'hui zo bet ken tost d'ar maro ;  
Emaoc'h brema leun a vuez  
Ehars treid santel ar Verc'hez.

7.

O Mam Doue, leun a honor,  
C'hui a zo stereden ar mor,  
C'hui 'zo mam ar vartoloded,  
Ha sikour an oll Vretoned.

8.

C'hui vel hor bagou, hon listri,  
Gant peb amzer o veachi,  
Gant ezenn zoupl ha sioul meurbet,  
Ha gant avelou dirollet.

9.

Pa vezomp o tremen ar Raz,  
Hor beuz bepred nec'hamant vraz ;  
Brema, pa velimp ho c'himach,  
E kemerimp nerg'ha courach.

10.

Varzu ennoc'h raimp eur bedenn,  
Hag ouz'omp c'hui 'zello laouen ;  
'Kreiz ar gerrek c'hui hon hentcho,  
Ha diouz peb drouk hon diouallo.

11.

A dost, a bell, e peb karter,  
Be vech ma vezimp en danjer,  
Ouz'och, Guerc'hez, ni n'em voestlo  
Ha sur, c'hui Mam, hor sikouro.

12.

Hag er ger hor bugaligou,  
Hor gragez paour hag hor mammou,  
Evidomp, o Guerc'hez-Vari,  
Devez na vankint d'ho pedi.

13.

Ar bed a zo eur mor traitour :  
An drouk-spered, hon adversour,  
Varnhan a c'houez avelou foll,  
'Vit kass hon eneou da goll.